

# Canticou tennet euz « Telen ar C'hristen ».

## CANTIC 1.

Doun-vôr braz eo He garantez,  
He drugarez 'zo hep fin,  
Mervel 'ra Crouer ar vu-ez  
Evid prena bu-ez d'in ;  
Piou eo 'n den 'ta Hen dizonjo ?  
Piou na veulo nerz He vreaç'h ?  
'R zonzj euz He garantez 'bado  
Keit ma pado 'n env en neac'h.

## CANTIC 2.

1. Setu Unan 'dle bea caret,  
Tener eo, mond 'rann d'He gaoud,  
Caerder 'n env ! ra vô va spered  
Sclereet mad 'vid He anaoud ;  
    He garantez (*ter.*)  
'Vô va joa beteg ar bez.
2. Jesus, Salver ar re gollet,  
D'ar re glanv, Medisin mad,  
Pardon 'ra d'an den he bec'hed,  
He garantez atao 'bad ;  
    Gloar d'am Zalver, (*ter.*)  
Mignon eo d'ar pec'her paour.

## CANTIC 3.

1. Hosanna ! Gloar d'ar Zalver  
A varvaz var ar C'halver,  
Ar zilvidigez 'n deuz achuet,  
Doue\* 'r bed eo hon Difenner :     (\* *pe*, Roue).  
Bennoz eternal dezhan,  
Deut eo d'hor c'haoud He-unan,  
Digemmer mad 'ro d'ar re lôr,  
An nôr 'zo digor breman.
2. Savetei 'ra hep scuiza  
Pec'herien deuz ar falla ;  
Eur zilvidigez grenv meurbed  
D'an holl 'zo offret brema ;  
Deomp holl d'He gaoud hepdale,  
Atao (e) pad He drugare,  
Gervel 'ra meur a bec'her braz  
Da gaoud He c'hrâs c'hoaz bemde.

## CANTIC 4.

1. N'euz ket er bed Mignon sùr 'vel Jesus,  
     N'euz ket gour\* ; (bis.) (\* pe, N'euz ket den).  
   Hini da iac'haad hor c'hlenved heuzus,  
     N'euz ket gour ; (bis.)  
   Anaoud a ra hor stad malheurus,  
   E peb encrez Hen hor sicour\* ,       (\* pe, difen).  
   N'euz ket er bed Mignon sùr 'vel Jesus,  
     N'euz ket gour. (bis.)
2. Mignon ebed ken hu-el ha santel,  
     N'euz ket gour ; (bis.)  
   Mes n'euz ket Mignon ken dous ha fidel,  
     N'euz ket gour. (bis.) Anaoud a ra etc.
3. N'euz ket eun heur n'ema ket 'n hor c'hichen,  
     N'euz ket gour ; (bis.)  
   Noz du ebed (ha) ne ro ket sclerijen,  
     N'euz ket gour. (bis.) Anaoud a ra etc.
4. Piou euz He dud 've bet gantan nac'het ?  
     N'euz ket gour ; (bis.)  
   Piou 've ken fall ma ve bet refuset ?  
     N'euz ket gour. (bis.) Anaoud a ra etc.
5. N'euz ket donezon 've henvel outhan,  
     N'euz ket gour ; (bis.)  
   Piou 'choumo fidel dre 'r maro 'velthan ;  
     N'euz ket gour. (bis.) Anaoud a ra etc.

---

## CANTIC 5.

1. Gwall-bell oun bet deuz ti va Zad,  
   Dond a rann d'ar ger ;  
   Dre 'r pec'hed eo deut trist va stad,  
   Dond a rann d'ar ger.  
     O va Zad ! O va Zad !  
     Va digemmer mad ;  
   Dre Da c'hrâs oun prenet ker,  
   Dond a rann d'ar ger.
2. Va buez a-grenn 'zo êt da goll.  
   Dond a rann d'ar ger ;  
   Keuz em euz deuz va bu-ez holl,  
   Dond a rann d'ar ger. O va Zad ! etc.
3. Scuiiz gant va fec'hed oun erfin,  
   Dond a rann d'ar ger ;

- Da c'hrâs az peuz promettet d'in,  
Dond a rann d'ar ger. O va Zad ! etc.
4. Digalon, sempl, heb nerz ebed,  
Dond a rann d'ar ger ;  
Crenvâ va feiz, va dalc'h bepred,  
Dond a rann d'ar ger. O va Zad ! etc.
- 

CANTIC 6.

1. Deut holl, iaouanc ha coz,  
Da gaoud ar C'hris, poent eo ;  
Pasianted Doue 'c'hortoz  
Pa leusc ac'hanomp beo ;  
Dond 'ra an noz ; O pebez grâs !  
— An nôr d'ar vuez 'zo digor c'hoaz.
2. Ho kein dehan ho peuz troet,  
Mes deut d'He gaoud en dro ;  
He zorn 'asten bepred,  
Digemmer mad a ro ;  
He galon 'zo leun-barr a c'hrâs,  
Trugarez 'ro d'ar pec'her braz.
- 

CANTIC 7.

'Creiz doureier braz ha tarziou  
N' em euz gour\* a zav va fenn (\*pe, hini (a)).  
'Med ar C'hris, va Breur en envou,  
'Zo bet maro 'vid an den ;  
Breur d'in eo e ster ar Jourdan\* (\*pe, ar maro).  
'Zalc'h va fenn a-uz d'an dour,  
Cana 'rinn 'n eur zelled outhan,  
Evelthan n' anvean gour.

---

CANTIC 8.

1. O ! Spered pur ha santel,  
Araog ma-z-inn d'an traon\*, (\*d'ar maro).  
Ro d'in dre Da c'her fidel  
Da beoc'h 'gass cwit peb aoun ;  
Ar pardon a c'houlennan,  
Da bardon, O va Zad !  
Ro d'in Da bardon breman  
'Vid netra dre ar Gwad.
2. Er C'hris bez 'zo tenzoriou  
A c'hrâs d'ar falla den,  
Mil vertuz en He varo,  
He wad a walc'h hepken ;  
Cred enhan, te a drec'ho



Da cnebourien fall,  
O! cred, ha joa a gargo  
Da ene trist ragtal.

CANTIC 9.

Meulit Doue, soursen peb grâs,  
Hen meulit holl, bihan ha braz ;  
C'hwi, eled\* pur, savit ho cân (\*pe, elez).  
D'an Tad, d'ar Mad, d'ar Spered Glan.

CANTIC 10.

1. Peb Breizad tomm-galon a gâr mad he vro,  
Bro Arvor 'zo brudet dre 'r bed tro-var-dro ;  
Er brezel calonnec, hon tadou ervad  
A scuiliaz evithi ho gwad.  
O va Mamm-Vro ! cared a rann va bro,  
Keit ma vô 'r môr 'vel mur en dro,  
Ra vezo libr atao va bro.
2. Bretoned, tud caled, 'vel dero int crenv,  
Bro-Breiz eo ar gaera 'zo dindan an env ;  
Peb menez, pep traonien a garomp ervad,  
Hon tadou ho livaz a wad.  
O va Mamm-Vro ! etc.
3. Gwin ardant 'vel tirant a wasc var an dud,  
Ho spered, ho c'halon, ho c'horf hag ho brud  
D'an tirant criz, heuzus 'zo gwerzet 'vel preiz ;  
Deut, stlapomp ar monstr deuz a Vreiz.  
O va Mamm-Vro ! etc.
4. Bea libr eo heritach peb bugel a Vreiz ;  
D'an traon ! ar vezventi ha pep pleg direiz !  
Eur galon lân, honest ne grên dirag den,  
Dre 'r vertuz, O Breiz ! sav da benn.  
O va Mamm-Vro ! etc.
5. Sav hu-el da vanniell, O Breiz ! En araog !  
'Vid gounid peb vertuz, hag enho choum crog ;  
— Sclerijen, carantez, lealded d'an holl,  
Da vrud ne-d-ai biken da goll.  
O va Mamm-Vro ! etc.
6. Henoret oud bet gant da vibien gwechall,  
En amzer da zond az pô c'hoaz mibien leal,  
Dre-holl evel bleuniou peb vertuz 'vô stanc,  
Bez atao benniget ha franc.  
O va Mamm-Vro ! etc. (1895) W. J. JONES.  
(Caner an discan evel hen :)